

INVOCATION DA SANTES-ANNA-AR-PALUD.



(Air : Me a laca ma fizianç).

AR GRAGUES.

Glorius Santes-Anna,  
C'houi oc'h eus concevet  
En ho éof sacr ar glana  
Eus an oll guerc'hesed,  
Ha douguet var ho parlen  
Ho merc'hic adoret,  
Mari, ar gaera sterren  
Eus an oabl alaouret.

—  
(Air : Adoromp oll).

AR VOASED.

Santes-Anna,  
Pe bris oc'h eus recevet  
Evit maga  
Rouanes ar guerc'hesed?  
Ne ouisse den compren  
An dudi oc'h eus bet  
Pa voach' o tiorren  
Mam redemptor ar bed.

—  
AR GRAGUES.

Peb uurnes  
Oc'h eus pelloët diouthi  
Ous ho furnes  
Bepred et caras senti.  
Renit e peb amser  
Var hon tieguesion,  
Ma vezogand preder  
Heuliet ho quenteliou.

## AR VOASED.

Mam hegárad,  
 Dalc'hit ató digoret  
     Ho taoulagat  
 Var zonar ar Vretoned.  
 Cassit pell eus hor bro  
 Ar sperejou direis,  
     Ha mirit var on tro  
 Ar re a zuj d'ar feis.

## AR GRAGUES.

Choui rent he ners  
 D'ar c'hlavour qu'es dilavar,  
     D'ar c'ham ar c' hers,  
 Ar c'blevet d'ar re youzar,  
 D'ar martolod risquet  
 Choui gonserv ar vues,  
 Hac ar péc'her caled  
 A gav ennhoc'h trues.

## AR VOASED.

Mam a zouçder  
 Enoret var ar palud  
     Hars hoc'h auter  
 Gand respet ni ho salud.  
 Mam gos salver ar bed,  
     Ha c'houi, he merc'h santel,  
 Ni a jomo bepred  
 Dezoc'h ho-tiou fidel.

( Air : Me a laca ma fizianc.

## GOASED HA MERC'HED.

Santes murbet gloriis,  
 Un deis ni a gano  
 Er barados dudius  
 Meuleudi d'hoc'h ano.

Da c'hortos, grit ma vesimp  
 Miret dious peb goall,  
 Ha dre ho ners ra vrevimp  
 Ieo ar sperejou fall.

---

**LITANIQU SANTES-ANNA-AR-PALUD.**


---

Santes-Anna, c'houi a zo bet dilennet  
 Evit conceo mam hon doue incarnet.

—  
 Ni ho salud, aienen bur ar guened.

—  
 Oh ! nac a vech, maguères leun a zoucder,  
 Oc'h eus laouen briatet mam hor salver !

—  
 Santes-Anna, bezit mad en hor c'henyer.

—  
 Emhi oc'h eus laquet dre ho quenteliou  
 An ad santel eus ar c'haera vertusiou.

—  
 Santes-Anna, renit hon tieguesiou.

—  
 E Breis-Isel, harsic ar mor fuloret,  
 Var ar Palud c'houi zo bepred enoret.

—  
 Santes-Anna, protejit ar Vretoned.

—  
 Var an dour-sall, e creis ar stourm dirollet,  
 C'houi a zicour ar mordead desolet.

Santes-Anna, ra vezot ato meulet.

Dre ho calloud ar c'hlavour paour a bare,  
Ar mud a goms, hac an den cam a vale.

Santes-Anna, r'ho meulint e peb mare.

Gant a bec'her eus Doue dispartiet  
Dre ho sicour a zo bet difasiet !

Santes-Anna, ra vezot glorifiet.

Endra baro an heol var an torguennou,  
Endra luc'ho ar glis var ar glasennou,

Santes-Anna, luc'hit en hor c'halonou.

Squis er bed-man, ho pugale a c'hortos,  
Gant ho sicour reposvan ar Barados.

Santes-Anna, roït desomp ho pennos.

*par Docteur Guizouarn.*

